

BARZHONEGOU KENTAN

CANU ANEIRIN

CANU TALIESIN

CANU LLYWARCH
HEN

**KINNIGET GANT
MORWENNA JENKIN**

SKRID 32

SKRID 32

RAKSKRID	P.3
KLEMMGAN MARV OWAIN	P.11
EMGANN ARGOET LLWYFEIN	P.13
BARZHONEGOU ANEIRIN	P.15
KAN AN HINI KOZH	P.23
SAL-VRAS CYNDDYLAN	P.29
ERER ELI	P.33

10 LUR

SKRID 82

KELAOUENN DISKLERIET HERVEZ LEZENN
TREDE TRIMIZIAD 1982
TI-MOULAN PREVEZ
RENER : GWENDAL DENEZ
CHOMLEC'H : RI, PLOARE,
29100 DOUARNENEZ
KOUANANT EVIT 4 NIVERENN : 40 LUR
PRIZ AN NIVERENN-MAN : 10 LUR
CCP 1499 51 ROAZHON

CANU ANEIRIN, CANU TALIESIN

HA CANU LLYWARCH HEN

RAKSKRID

E-kerz tri c'hantved, etre 550 ha 850 goude Jezuz-Krist eo bet savet ar barzhonegoù-mañ. Mare aloubidigezh Enez Breden gant ar Saozon an hini eo. Troc'het eo bet Kerne Veur ha Devon diouzh rouantelezhioù all Preden tro 516 gant emgann Baddon. Gant emgann Chester (Caer), e 613, ha Winwaed Field, e-kichen Leeds e 655, eo bet troc'het da vat Predeniz an hanternoz (gwalarn Bro Saoz, kreisteiz Bro Skos hirio) diouzh re Bro Gembre. 'Yr Hen Ogled' (an hanternoz kozh) vez graet diouzh ar rouantelezhioù Predenat-se. Peder rouantelezh Predenat a oa : Gododdin, Strathclyde, Elfed ha Rheged ha div rouantelezh Saoz en o c'hichen (e biz Bro Saoz hirio) : Beirnicia ha Deira. E-barzh barzhonegoù Aneirin ha Taliesin e vez kontet an emgannoù taer zo bet etre rouantelezhioù Predenat 'Yr Hen Ogled' hag ar rouantelezhioù Saoz. Istor ar Bredeniz o klask herzel ouzh aloubidigezh ar Saozon an hini eo.

Ne ouzer ket kalz a dra diwar benn buhez Taliesin hag Aneirin. Savet eo bet barzhonegoù Taliesin e-pad ar c'hwec'hvet kantved met an dornskrid koshañ hon eus anezho a zo bet skrivet tro 1275, c'hwec'h

kantved diwezhatoc'h . Skrivet eo bet ar barzhonegoù a-raok marteze, e-pad an navet kantved. An dra-se a ziskouez eo dre an hengoun dre-gomz eo bet miret ar barzhonegoù met den ne oar hag-eñ int bet kemmet kalz pe get. Taliesin a zo bet barzh Urien (Priñs Rheged) hag hini e vab Owain dreist-holl. Da vare ar Bredeniz e oa ur barzh da bep roue pe briñs. Ur vicher resis oa hini ar barzh e kevredigezh ar Bredeniz. Paet e veze gant ar roue (dilhad, kezeg, boued, chouchenn a veze roet dezhañ kentoc'h evit arc'hant) hag e-giz-se e ranke kanañ klod ar roue. Brokusted ha kalonegezh ar roue a veze meulet dreist-holl. Ne oa ket e vicher barn ar roue. Roet e veze kalon d'ar vrezelourien gantañ ha derc'hel a rae talvoudegezhioù ar gevredigezh en o sav, en ur zegas gloar d'ar meuriad. Istorour e oa ar barzh ivez. Derc'hel a rae soñj eus lignez ar roue.

Ur gevredigezh harozel an hini oa, diazezet war dalvoudegezhioù brezel. "Emgann Argoet Llwyfein" a gont istor an emgann-se ; Urien, Owain ha priñsed all o stourm a-enep da Fflamddwyn, ur priñs saoz. Savet eo bet e doare un diviz etre an tri friñs. Er gevredigezh harozel ne dec'he ket kuit ar vrezelourien. Gwelloc'h dezhe mervel kentoc'h evit bezañ lakaet da dud digalon.

"Dirak Argoed Llwyfein
E voe kalz korfoù marv.
Ruzañ a rae ar brini rak ar gadourien
Hag ar bobl en em gannas hant he rener".
(Emgann Argoet Llwyfein)

Ar barzh a ranke kanañ klod ar priñs goude e varv ivez evit bezañ sur ez afe e ene d'ar baradoz. E "Klemmigan Marv Owain" e vez meulet e galon hag e nerzh en emgann gant skeudenoù brav :

"Evel ur bagad bleizi o redek war-lerc'h deñved.
Kadour marzhus, splann gant e harnez liesliv,
A roe kezeg d'ar re a c'houlenne",
(Klemmigan Marv Owain)

Evel ma oa Taliesin barzh Urien, priñs Rheged, e oa Aneirin barzh Mynyddawg, priñs Gododdin (Y Gododdin 'zo titl ar barzhoneg, anv ar meuriad kenkoulz hag anv ar rouantelezh).

Disheñvel eo barzhoniezh Aneirin (savet er seizhvet kantved) diouzh barzhoniezh Taliesin peogwir eo diwar-benn un emgann bras nemetken ha n'eo ket meur a hini. N'eo ket un danevell-epik dre ma ne gont ket istor an emgann. Bez' e vez meulet kentoc'h ur brezelour pe un toullad brezelourien pe an arme en he fezh e pep gwerzenn. Kalonegezh ar vrezelourien aet da glask adaptout Catraeth a vez meulet enni. Ur gêr bouezus gwechall evit ar Bredeniz oa Catraeth met kemeret e oa bet gant ar Saozon. War an harzoù etre Deira ha Beirnicia e oa, e-kreiz rouantelezhioù a oa er mare-se dalc'het gant ar Saozon. Aet ar maout gant ar Saozon a-benn ar fin ha ne voe nemet tri den (pe unan, n'eo ket sur) a zo chomet bev. Aneirin a oa unan anezho.

Meuliñ a ra Aneirin kalon ar vrezelourien varv. Alies ne roe nemet anv ar re varv :

"Caradog ha Madog, Pyll hag Ieuan,
Gwgon ha Gwian, Gwyn ha Cynfan,
Peredur e armoù dir, Gwarddur hag Aeddan"
(Gwerzenn XXXI)

War varc'h ez ae Predeniz d'an emgann, houarn-wisket. N'eo ket sur e oa kezeg gant ar Saozon d'ar mare-se.

"Strewiñ a reas daredoù onn diouzh palv e zorn,
Diwar ur marc'h ruz ha moan o c'hwezhañ".
(Gwerzenn XXVI A)

Laret eo bet gant Aneirin e veze roet chouchenn d'ar vrezelourien ur bloavezh-pad a-raok an emgann. Tud 'zo o deus soñjet e oa bet kollet an emgann peogwir e oa mezv an holl vrezelourien ! E gwir-

ionez, e oa, ar chouchenn a veze roet, arouez an emglev etre Mynyddawg hag e vrezelourien. "Talu medd" (Paeañ chouchenn) a vez graet deus an emglev-se e kembraeg. Roet e veze chouchenn ha boued d'ar vrezelourien e-pad ur bloaz pa oant oc'h embregiñ a-raok mont d'an emgann hag e-giz-se e rankent en em gannañ diouzh o gwellañ evit ar roue.

"Dellezek e oas d'ar chouchenn a laouenidigezh,
Morien tan".
(Gwerzenn XXXIV)

Bezañ kalonek war dachenn an emgann a zo unan eus an talvoudegezhioù harozel met dav e oa d'ar vrezelourien ivez bezañ dereat er gêr, kourtez memes. Er werzenn XXVII e vez meulet doareoù seven Izaag da gentañ hag e nerzh kalon en emgann goude-se.

Kristenaet e oa bet ar Bredeniz da vare ar Romaned hag alies ez echu ar gwerz gant ur c'houlblad o c'houlenn ez afe ene an hini marv d'ar baradoz.

Embannet eo bet levr barzhonegoù Llywarch Hen gant Syr Ifor Williams. Daou dra a oa bet treuz-komprenet gantañ d'ar mare-se ha diwar an hini kentañ e teu an anv "Canu Llywarch Hen" rak e gwirionez eo tri barzhoneg disheñvel a gaver en hevelep levr : Kelc'h Llywarch Hen - Kelc'h Heledd ha Kelc'h ar Mab Klainv (Cylch y mab claf).

Kredet en doa ivez e oa bet savet en holl varzhonegoù gant Llywarch Hen, pezh n'eo ket prouet. Evit gwir ne ouzer ket gant piv int bet savet. Diwezhatoc'h evit barzhonegoù Aneirin ha Taliesin int bet savet e-kerz an navet kantved. N'int ket bet savet kennebeut en Hanternoz Kozh (Yr Hen OGledd) met e Bro Gembre, e rouantelezh Powys.

Ur priñs, kar da Urien e oa Llywarch Hen. Edo o chom e Rheged a-raok divroañ. Gant ar Saozon e voe skarzhet kuit, eñ hag e vibien, setu ma rankas bevañ en harlu e rouantelezh Powys :

"Kent din bezañ kromm ma c'hein e voen sonn,
Degemeret e oan bet e trepas sal-vras
Powys, paradoz Kembreiz"

(Kan an hini kozh)

Disheñvel eo barzhonegoù Llywarch Hen diouzh barzhonegoù Aneirin ha Taliesin. N'eo ket barzhoniezh harozel ken. Santimantoù a vez displeget enni. Ur barzhoneg a-ziforc'h eo "Kan an hini kozh". Evit ar wech kentañ e vez graet dave e barzhoniezh Kembreouzh ar gozhni, an natur, an hiraezh hag ar blanedenn. Kenveriañ kozhni ha yaouankiz Llywarch Hen a ra ar barzh :

"Kozh on, digenvez, skoanet ha yen.
Goude din bezañ bet ur gwele brudek
On reuzeudik ha pleget etre tri"
(Kan an hini kozh)

Stad an hini kozh a zo keñveriet gant koulzioù ar bloaz. E vazh, e skoazell, a zo lakaet da zen hag e vez kaozeet outañ :

"Bazh-loaiek goad an diskar-amzer eo,
Raden ruz, kolo melen.
Kaset em eus diwar ma zro an traoù a garan".
(Kan an hini kozh)

Erru skuizh gant ar vuhez eo Llywarch Hen. Hiraezhiñ a ra d'e vibien lazhet. Tonket eo da ren ar vuhez-se. C'hoant en deus mervel met en aner eo peogwir ne dosta ket an Ankou :

"Ur blanedenn galet a zo bet lakaet da Llywarch
Abaoe an noz eo ganet,
Enoe hir, ehan ebet d'am skuizhder".

Savet eo bet ar barzhonegoù e doare "englynion", un heuliad pozioù teir gwerzenn e pep hini anezho.

Eus santimantoù ez eus kaoz ivez e barzhonegoù

Heledd. O chom e oa Heledd e Powys d'ar seizhvet kantved ha savet eo bet ar barzhonegoù diwar he fenn en navet kantved. Lazhet eo bet he breur, Cynddylan Cynddrwyn, ur priñs eus Powys pa oa eñ oc'h en em gannañ a-enep d'ar Saozon. E "Sal-vras Cynddylan" emañ Heledd o hiraezhiñ da sal-vras he breur bet distrujet gant ar Saozon hag o soñjal penaos e oa en amzer dremenet. Ne guzh ket he zristidigezh.

"Ur rann-galon eo evidon gwelet sal-vras Cynddylan,
Hep toenn, hep tan,
Marv eo ma Aotrou ha me a zo bev".

Savet eo bet ar barzhonegoù-se d'ar mare ma oa ar Saozon o lakaat rouantelezh Powys en arvar ha menegiñ a ra ar mare m'eo bet kroget an emgannoù-se, da laret eo ar seizhvet kantved. E "Erer Eli" e veneg Heledd al lazhadeg adarre. Lazhet eo bet ar vrezelourien ha debret int bet gant an erer, arouez an emgann. Ur skeudenn skrijus eo :

"Erer Eli a evezh ar morioù,
Ned a ket da besketa ken en aberioù ;
Azgoulenn a ra ur friko diwar wad ar vrezelourien"
(Erer Eli)

Barzhonegoù "Y Cynfeirdd" (Ar Varzhed kentañ) a zo e-touez ar re wellañ a zo bet savet d'ar mare-se en Europa. Gant ar re-se e krog hengoun lennegel Kembre. Un hengoun pinvidik, kendalc'het gant barzhed veur evel Gruffydd ab Yr Ynad Coch, Dafydd ap Gwilym, Pantycelyn ha T.H. Barry-Williams .

Morzenna JENKIN



MARWNAT OWEIN

Eneit Owein ap vryen
Gobwyllit ren oe reit.
Reget ud ae cud tromlas.
Nyt oed vas y gywydeit.
Iscell gur kerdglyt clot uawr
Escyll gwawr gwaywawr llifeit.
Canycheffir kystedlyd.
Y vd Llwyvenydd llatreit.
Medel galon geueilat.
Eissylut y tat ae teit.
Pan ladawd Owein fflamddwyn.
Nyt oed uwy noc et kysceit.
Kyscit lloegyr llydan nifer
A leuuer yn eu llygeit.
A rei ny ffoynt hayach.
A oedynt (hya)ch no reit.
Owein ae cospes yn drut
Mal cnut (y)n dylut deueit.
Gwr gwiw uch y amliw seirch.
A rodei veirch y eircheit.
Kyt as cronyei mal calet.
Ry rannet rac y eneit.
Eneit. O. ap vryen.

KLEMMGAN MARV DWAIN

Ene Owain ab Urien,
Ra zalc'ho soñj an Aotrou eus e ezhommoù.
Kuzhet eo Aotrou Rheged dindan al leton pounner
ha glas,
Ne gaver ger ebet evit e veuliñ.
Er bez ar c'hadour brudet er gwerziou, leun a
c'hloar,
Evel skinoù tarzh-an-deiz e oa lemm e oafou,
Kar ne c'heller ket kavet par da
Aotrou Llwyfennydd, an hini marzhus,
Meder enebourien, skraper,
Par d'e dad ha d'e hendadoù.
Pa lazhas Owain Fflamddwyn
E voe ken aes dezhañ ha kousket.
O kousket emañ bremañ bagadoù niverus ar Saozon,
Ar goulou o parañ en o daoulagad.
Ar re ne dec'hjont nemet un tamm
A oa kalonekoc'h evit na oa ret ;
O c'hastizañ a reas Owain, didruez,
Evel ur bagad bleizi o redek war-lerc'h deñved.
Kadour marzhus, splann gant e harnez liesliv,
A roe kezeg d'ar re a c'houlenne.
Daoust ma vernie madoù evel un den pizh
E ranne anezho evit e ene,
Ene Owain ab Urien.

GWEITH ARGOED LLWYFEIN

E bore duw sadwrn kat uawr a uu.
Or pan dwyre heul hyt pan gynnu.
Dygryswys flamdwyn yn petwar llu.
Godeu a reget y ymdullu.
Dyuyn o argoet hyt arvynydd.
Ny cheffynt eiryos hyt yr vn dyd.
Atorelwis flamdwyn vawr trebystawt.
A dodynt yg gwystlon a ynt parawt.
Ys atebwys. Owein dwyrein ffossawt.
Nyt dodynt nys ydynt nyt ynt parawt.
A cheneu coel bydei kymwyawc
lew. Kyn as talei o wystyl nebawt.
Atorelwis vryen vd yr echwyd.
O byd ymgyfaruot am gerenhyd.
Dyrchafwn eidoed oduch mynyd.
Ac ym borthwn wyneb oduch emyl.
A dyrchafwn peleidyr oduch pen gwyr.
A chyrchwn fflamdwyn yn y luyd.
A lladwn ac ef ae gyweithyd.
A rac argoet llwyfein
by llawer kelein.
Rudei vrein rac ryfel gwyr.
A gwerin a grysswys gan enewyd.
Armaaf blwydyn nat wy kynnyd.

Ac yny vallwyfy hen
Ym dygyn agheu aghen.
Ny bydif ymdyrwen
Na molwyf vryen.

EMGANN ARGOET LLWYFEIN

D'ar sadorn beure e voe un emgann bras,
Adalek ma sav an heol betek ma kuzh
Ez argadas Fflamddwyn gant peder arme.
Goddau ha Rheged d'en em zastum,
Galvet eus Argoed da Arfynydd,
Ne c'hellont ket kaout un devezh dale zoken.
Youc'hal a reas Fflamddwyn en ur fogasiñ :
"Lakaet eo bet ar gouestlidi, prest int ?"
Dwain, gwalenn ar Reter a respontas dezhañ :
"Ne vint ket lakaet, n'int ket prest,
Ha diskennad Coel a vefe enkrezet,
Gwall enkrezet, ma rankfe paeañ ur gouestlad
bennak".

Youc'hal a reas Urien, tiern Erechwydd :
"Ma' z eus divizoù diwar-benn un diskrog-brezel
E savimp mogerioù war lein ar menez
Hag e talc'himp an dremm a-us da nec'h hon skoed
Hag e savimp hon goafoù a-us d'hon pennoù
Hag e tagimp Fflamddwyn e-kreiz e vagadoù
Hag e lazhip, n'eo ket nemetañ met e gompagnuned
ivez".

Dirak Argoed Llwyfein
E voe kalz korfoù marv.
Ruzañ a rae ar brini rak ar gadourien
Hag ar bobl en em gannas gant he rener.
Ur bloavezh-pad e kanin d'o zrec'h.
Betek ma vefen debret gant ar gozhni,
Betek ma marv a zo bet tonket a-dra-sur,
Ne vin ket laouen
Ma ne veulan ket Urien.

CANU ANEIRIN

XXVI A.

Bu gwir mal am ceude e gatlew.
Ny deliis meirch neb marchlew
heessit waywawr y glyw.
Y ar llemenic llwybyr dew.
Keny vaket am byrth am borth ;
dywal y gledyual yn y orth
heessyt onn o bedryollt
y law ; y ar veinnyell vygedorth.
Yt rannei rygu e rywin ;
yt ladei a llaunv vreith oeithin.
Val pan vel medel ar vreithin
e gwnaei varchlew waet lin.

XXVI B.

Geu ath diwedus tutleo
na deliis meirch neb marchlew
keny vaccet am byrth amorth
oed cadarn e gledyual ynyorth
un rwy ysgéinnyei y onn o bedryholl
llav y ar vein erch mygedorth.

*Notenn : Daou zornskrid e-giz-se (XXVI A ha XXVI B)
a zo bet kavet. Heñvel eo ar gwerzioù a-wechoù.
Gwechoù all, avat, int disheñvel-rik. Diskouez a ra
kement-se levezon an hengoun dre gomz.*

BARZHONEGOU ANEIRIN

XXVI A.

Gwir e oa ar pezh a lare Catlew.
Kezeg den ne dapas Machlew.
Strewiñ a reas goafoù en emgann
Diwar ur marc'h dizoac'het, ledan e roudoù
Daoust ne oa ket bet maget en-dro d'ar porrastel-
loù e roas an dorn
Garv e oa taolioù e gleze, en e emzalc'h emgann.
Strewiñ a reas daredoù onn diouzh palv e zorn,
Diwar ur marc'h ruz ha moan o c'hezhañ.
Da bep hini e roe ar brezelour karet gwin forzh
pegement
Lopañ a rae gant ul loanenn saotret ha garv,
Evel ur meder pa dro fall an amzer
E rae Machlew froudadoù gwad.

XXVI B.

Gaou a laras dit Tutlew
Kar kezeg den ne dapas Machlew.
Daoust ne oa ket bet maget en-dro d'ar porrastel-
loù e roas an dorn
Kadarn e oa taolioù e gleze en e emzalc'h emgann.
Strewiñ a reas daredoù onn a-vil-vern diouzh palv
e zorn
Diwar ur marc'h moan ha brizh o c'hezhañ.

XXVII

Issac anuonawc o barth deheu.
Tebic mor lliant y deuodeu.
O wyled a llaryed
a chein yuet med ;
men yt glawd e offer
e bwyth madeu.
Ny bu hyll dihyll na heu diheu.
Seinnyessyt e gledyf ym penn mameu.
Mur greit oed moleit ef mab gwydneu.

XXVIII

Keredic caradwy e glot.
Achubei gwarchatwei not.
Lletvegin is tawel kyn dyuot
e dyd gowychyd y wybot.
Ys deupo car kyrd kyvnot
wlat nef adef atnabot.

XXIX

Keredic caradwy gynran.
Keimyat yg cat gouaran.
Ysgwyt eur crwydyr cadlan ;
gwaewawr uswyd agkyuan.
Kledyual dywal diwan.
Mal gwr catwei wyaluan.
Kynn kysduð daear kynn affan
o daffar diffynnei e vann.
Ys deupo kynnwys yg kyman.
Can drindawt en vndawt gyuan.

XXVII

Izaag, an den marzhus eus ar c'hreisteiz
Par e oa e voazioù da lanv ar mor ken hegarat
Ha ken brokus e oa eñ,
Ken dereat e veze oc'h evañ chouchenn.
E-lerc'h ma doulle e armoù
Ne glaske ket ur gopr.
N'eo ket ur wech dre vare e veze ferv,
Ne lare ket gevier ur wech hag ar wirionez ur
wech all ;
Seniñ a rae e gleze e penn mammoù' zo,
Ur voger e oa en emgann,
Dellezek e oa d'ar meuleudioù, mab Gwydnau.

XXVIII

Ceredig, plijus e veuleudioù
Tapet ha derc'hel a rae brud-mat
Ar breur laezh, sioul kent na teuas
Devezh e varv, dispar e gourtezi.
Gant ma'z ay mignon ar gouelioù barzhoniezh
Da Rouantelezh an Neñv, annez an Holl-Quiziegezh.

XXIX

Ceredig, ar rener karet,
Kevezer kriz en emgann,
Ar skoed aour-neudenneget gantañ war an dachenn
emgann,
Goafoù freuzet ha torret gantañ
Un taol kleze kriz ha kadarn dezhañ,
Derc'hel a rae e emzalc'h emgann evel ur gwaz.
Dreist poanioù an douar, dreist anken ar marv,
Evit tizhout e bal e tifenne e blas er renk.
Gant ma vo degemeret e Bodadeg an Neñv
Gant an Dreinded er peurunvaniezh

XXX

Pan gryssyei garadawc y gat ;
amal baed coet trychwn trychyat.
Tarw bedin en trin gomynyat ;
ef llithyei wydgnw oe anghat.
Ys vyn tyst ewein vab eulat.
A gwryen, a gwynn a gwryat.
O gatraeth o gymynat.
O vrynn hydwn kynn caffat.
Gwedy med gloew ar anghat
ny weles vrun e dat.

XXXI

Gwyr a gryssyassant buant gytneit.
Hoedyl verryon medwon uch med hidleit.
Gosgord vynydawc enwawc en reit.
Gwerth eu gwled o ved vu eu heneit.
Caradawc a madawc pyll ac yeuan :
gwgawn a gwiawn. Gwynn a chynvan.
Peredur arueu dur ; gwawrdur ac aedan.
Achubyeit eng gawr ysgwydawl angkyman.
A chet lledessynt wy lladassan ;
neb y eu tymhyr nyt atcorsan.

XXXII

Gwyr a gryssyassant buant gytvaeth.
Blwydyn od uch med mawr eu haruaeth.
Mor dru eu hadrawd wy. Angawr hiraeth.
Gwenwyn eu hadlam nyt mab mam ae maeth.
Mor hir eu hetlit ac eu hetgyllaeth
en ol gwyr pebyr temyr gwinvaeth.
Gwlgawt gododin en erbyn fraeth.
Ancwyn mynydawc enwawc e gwnaeth.
A phrit er prynu breithyell gatraeth.

XXX

Pa lammas Caradog er gad,
Evel ur pemoc'h-gouez e lazhas tri fenn-brezel,
Tarv an arme, lazher en emgann,
Bouetañ a rae bleizi diouzh e zorn.
Ma zestoù a oa Owain ab Eulad,
Gwrien, Gwynn ha Gwriad,
Kent dezho bezañ tapet
E Catraeth, e lec'h al lazhadeg, e Bryn Hyddwn,
Da heul ar chufere silet en o daouarn,
Hini ebet ne welas e dad en-dro.

XXXI

Mont a reas ar wazed a-stourm, holl a-gevret,
Berr o buhez mezv gant chufere silet,
Koskor Mynyddog, brudet en emgann,
Priz o c'horfad chouchenn a voe o buhez.
Caradog ha Madog, Pyll hag Ieuan,
Gwgon ha Gwian, Gwyn ha Cynfan,
Peredur e armoù dir, Gwawrdur hag Aeddan ;
Skraperien en emgann, skoedoù brevet ganto,
Ha daoust dezho bezañ bet lazhed e lazhjont.
Hini ebet anezho ne zistroas d'e vro.

XXXII

Ar wazed a yeas a-stourm a-gevret a oa bet desket
ha savet diwar chufere
E-pad ur bloavezh, bras e oa o c'hoantegezh.
Ken trist eo soñjal enno, debret on gant an
hiraeth.
C'hwerf al lec'h m'emaint o c'hourvez, ne oa den
evit o skorañ,
Ken hir an hiraeth dezho hag an dristidigezh war-
lerc'h
Bezañ kollet gwazed entanet bro gouelioù ar gwin.
Evit ar vrezelourien brim ez aozas
Gwylgawt eus Gododdin gouel brudet ar Mynyddog,
Koustus e voe prenañ douar Catraeth.

XXXIII

Gwyr a aeth gatraeth yg cat yg gawr.
Mythfeirch a gwrymseirch ac ysgwydawl.
Peleidyrr ar gychwyn a llym waewawl.
A llurugeu claer a chledyuawl.
Ragorei tylleri trwy vydinawl.
Kwydei bym pymwnt rac y lavnawl.
Ruuawn hir ef rodei eur e allawl.
A chet a choelvein kein y gerdawl.

XXXIV

Ny wnaethpwytt neuad mor orchynnwl.
Mor vawr mor oruawl y gyvlavwl.
Dyrrlydut medd medut moryen tan.
Ny thraethei na wnelei kenon kalan
vn seirchyawc saphwyawc soned lydan
seinnyessitt e gledyff em penn garthan.
Noc y cesgycc carrec vawr y hadvan.
Ny mwy gysgogitt wit uab peithan.

XXXV

Ny wnaethpwytt neuad mor anvonawl.
Ony bei voryen eil caradawl.
Nyt engis en trwm e lwrw mynawl.
Dywal dywalach no mab ferawl.
Fer y law faglei fowys varchawl.
Glew dias dinas e lu ovnawl.
Rac bedin ododin bu gwasgarawl.
Y gylchwy dan y gymwy bu adeuawl.
Yn dyd gwyth bu ystwyth neu bwyth atveillyawl.
Dyrrlydei vedgyrn eillt mynydawl.

XXXIII

Ar vrezelourien a zo aet da Gatraeth en un arme,
gant ar youc'hadenn vrezel,
Kezeg prim, gwiskoù-houarn glas-louet ha skoedoù
gant,
Ardamez skedus ha klezeoù.
Mont a rae an hini kentañ, toullañ a rae ar bagadoù
Pemp hag hanter kant den a gouezhas dirak e loanenn.
Rhufawn Meur a roe aour d'an aoter,
Profoù ha prizioù burzhudus d'ar barzh.

XXXIV

Biken ne voe savet ur sal-vras, kement a vrud dezhi,
Ken bras, ken meurdezus he zousmac'h.
Dellezek e oas d'ar chouchenn a laouenidigezh,
Morien tan
Ne lare ket ne rafe ket Cynon ur c'helan *,
Houarnwisket, ur oaf gantañ, pellvrudet,
Soniñ a rae e gleze e penn ar c'hirzhier-difenn.
Ne fiñvo ket ur garreg bras he zro
Muioc'h evit na fiñvo Gwid ab Peithan.
* Kelan = korf marv.

XXXV

Biken ne voe savet ur sal-vras ken burzhudus.
Nemet Morien a vefe, hag eñ heñvel ouzh Caradog,
Haroz ebet ne oa kalonekoc'h eget mab Fferog ;
Da heul an Aotrou, den ne dec'has kuit diouzh an
emgann,
Ferv e zorn, o tennañ tan a-zindan marc'heien o
tec'hel,
Kadarn er gad, gwarez evit ur bagad tud gant o
aon,
Dirak arme Gododdin e voe brevet e skoed ront,
Start e voe hag eñ en argoll ;
Difrae e voe deiz an emgann, c'hwerv e voe e
c'hopr.
Dleet-mat e veze kornadoù chouchenn da waz Mynyddog.

CANU LLYWARCH HEN - CÂN YR HENWR

Kembraeg kozh

Kynn bum kein vaglawc, bum kyffes eiryawc
Keinmygyr uy eres.
Gwyr Argoet eiryoet a'm porthes.

Kynn bum kein vaglawc, bum hy,
Am kynnwyssit yg kyuyrddy
Powys, paradwys Gymry.

Kynn bum kein vaglawc, bum eiryan ;
Oed kynwaew vym par, oed kyn(wan).
Wyf keuyngwrwn, wyf trwn, wyf truan.

Baglan brenn, neut kynhayaf.
Rud redyn ; melyn kalaf.
Neur digereis a garaf.

Baglan brenn, neut gayaf hynn.
Yt uyd llauar gwyr ar l(1)ynn.
Neut diannerch vy erchwyn.

Baglan brenn, neut gwa(ea)nnwyn.
Rud cogeu : goleu e gwyn.
Wyf digaret gan uorwyn.

Baglan brenn, neut kynteuin.
Neut rud rych ; neut crych egin.
Etlit ym edrych y'th yluin.

Baglan brenn, ganghen nodawc,
Kynhellych hen hiraethawc,
Llywarch lleueryd uodawc.

BARZHONEGOU LLYWARCH HEN - KAN AN HINI KOZH

*Kent din bezañ kromm ma c'hein e voe lemm ma zeod.
Bamet e oad ouzh ma zroioù kaer ;
Harpet e oan bet a-viskoazh gant gwazed Argoed.*

*Kent din bezañ kromm ma c'hein e voen sonn,
Degemeret e oan bet e trepas sal-vras
Powys, paradoz Kembreiz.*

*Kent din bezañ kromm ma c'hein e voen kaer ;
Dirak e veze ma goaf an hini kentañ da skuilhañ gwad ;
Keingromm on, trist, reuzeudik.*

*Bazh-loaiek goad an diskar-amzer eo,
Raden ruz, kolo melen.
Kaset em eus diwar ma zro an traoù a garan.*

*Bash-loaiek goad ar goañv an hini eo ;
Distagellet e vez teod an dud gant ar boeson,
Dilavar eo tal ma gwele.*

*Bazh-loaiek goad, an nevez-amzer an hini eo,
Kuzhet eo ar c'houkouged, sklaer eo o c'hlemmvan.
Kaset on diwar dro ur plac'h yaouank.*

*Bazh-loaiek goad, penn kentañ an hañv eo,
Ruz eo an erv, rodellek ar c'hreskoù.
Tristidigezh eo din sellet ouzh da veg.*

*Bazh-loaiek goad, brank boas din ;
Ha skoazellañ a rafes un den kozh hiraezhus,
Llywarch, rondon-e-glemmoù.*

Baglan brenn, ganghen galet,
Am kynnwysy Duw diffret.
Elwir prenn kywir kyniret.

Baglan brenn, byd ystywell.
Am kynhelych a uo gwell.
Neut wyf Lywarch lauar pell.

Kymwed y mae heneint
A mi o'm gwallt y'm deint
A'r cloyn a gerynt yr ieueinc.

Y mae heneint yn kymwed
A mi o'm gwallt y'm danned,
A'r cloyn a gerynt y gwraged.

Dyr gwenn gwynt : gwynn gne godre
Gwyd : dewr hyd, diwlyd bre.
Eidyl hen, hwyr y dyre.

Y deilen honn, neus kenniret gwynt.
Gwae hi o'e thynghet !
Hi hen ; eleni y ganet.

A gereis yr yn was yssy gas gennyf,
Merch, estrawn, a march glas.
Neut nat mi eu kyudades.

Ym pedwar prif gas eirmoet,
Ymgyuerynt yn vnoet,
Pas a heneit, heint a hoet.

Wyf gen, wyf unic, wyf annelwic oer,
Gwedy gwely keinmic,
Wyf truan, wyf tri dyblic.

Wyf tridyblic hen, wyf annwadal drut.
Wyf ehut, wyf annwar.
Y sawl a'm karawd, ny'm kar.

Bazh-loaiek goad, brank kalet,
Ra vin degemeret e gwarez Doue.
Ur vazh a vez graet ac'hanout, kenvaleer feal.

Bazh-loaiek goad, bez karadek,
Pe gwelloc'h c'hoazh, skoazell ac'hanon ;
Llywarch, un drailher-kaoziou on.

Ober a ra goap ouzhin ar gozhni,
Eus ma blev betek ma dent,
Hag ouzh an ibil a blij d'ar merc'hed.

Ar gozhni a ra goap ouzhin,
Eus ma blev betek ma dent,
Hag ouzh an ibil a blij d'ar merc'hed.

Avel a levenez, gwenn eo al liv ouzh treid
Ar gwez, dizaon eo ar c'harv, moal an duchenn.
Toc'hor an hini kozh, goustadik ez a.

An delienn-se, kaset digaset gant an avel,
Gwa hi rak he flanedenn,
Kozh eo, ganet eo hevlene.

Ouzh ar pezh a garen pa oan yaouank em eus kas,
Ur plac'h, un estren, ur marc'h buhezek.
Didalvoud on e-skoaz dezho.

Ar pevar tra am eus kasaet ar muiañ
A zo degouezhet war un dro, an holl anezho,
Ar paz, ar gozhni, ar gwall-gleñved hag an hiraezh.

Kozh on, digenvez, skoanet ha yen.
Goude din bezañ bet ur gwele brudek
On reuzeudik ha pleget etre tri.

Peurgromm ha kozh on, valigant ha foll,
Difur ha difeson.
Ar re a gare ac'hanon ne reont ket ken.

Ny'm kar rianed ; ny'm kenniret neb.
Ny allaf darymret.
Wi a agheu, na'm dygret !

Ny'm dygret na hun na hoen
Gwedy lleas Llawr a Gwen.
Wyf annwar abar, wyf hen.

Truan a dynghet a dynghet y Llywarch
Yr y nos y ganet :
Hir gnif heb escor lludet.

Ne gar ket ac'hanon ken ar merc'hed, den ne genvale
ganin.
Ne c'hellan ket kantren, din da welet unan bennak.
O Ankou, perak ne zeuez ket etrezek ennon ?

Ne zeu din na kousk na hun
Goude da Llawr ha Gwen bezañ bet lazhet.
Ur c'horf kozh ha skuizh on, kozh on.

Ur blanedenn galet a zo bet lakaet da Llywarch
Abaoc an noz eo ganet,
Enoc hir, ehan ebet d'am skuizhder.

CANU LLYWARCH HEN - STAFELL GYNDDYLAN

Stafell Gynddylan ys tywyll heno
Heb dân, heb wely ;
Wylaf wers, tawaf wedy.

Stafell Gynddylan ys tywyll heno
Heb dân, heb gannwyll ;
Nam Dwyw pwy â'm dyry pwyll ?

Stafell Gynddylan ys tywyll heno
Heb dân, heb oleuad.
Ellid a'm daw amdanad.

Stafell Gynddylan ys tywyll ei nen
Gwedi gwen gyweithydd.
Gwae ni wna da a'i dyfydd.

Stafell Gynddylan neud athwyd heb wedd
Mae ym medd dy ysgwyd.
Hyd tra fu ni bu dollglwyd.

Stafell Gynddylan ys digarad heno
Gwedi'r neb pieuad.
Wi o angau, pyr y'm gad ?

Stafell Gynddylan, nid esmwyth heno
Ar ben carreg hydwyth,
Heb nêr, heb nifer, heb amnwyth.

Stafell Gynddylan ys tywyll heno
Heb dân, heb gerddau.
Dygystudd ddeurudd dagrau.

BARZHONEG LLYWARCH HEN - BARZHONEG HELEDD
SAL-VRAS CYNDDYLAN

*Teñval eo sal-vras Cynddylan fenz,
Hep tan, hep gwele,
Gouelañ a ra ur pennadig, tevel a ran goude-se.*

*Teñval eo sal-vras Cynddylan fenz,
Hep tan, hep goulaouenn,
Piv a roio skiant din ma n'eo ket Doue.*

*Teñval eo sal-vras Cynddylan fenz,
Hep tan, hep goulou,
Hiraezhiñ a ran dit.*

*Teñval eo toenn sal-vras Cynddylan,
Goude ar vodadeg venniget,
Gwa neb na ra ket gant ar pezh a zeu dezhañ.*

*Sal-vras Cynddylan, aet out en ur gwall stad.
Emañ da skoed e-barzh ar bez.
Pa oa bev e c'helle chom digor toull an nor.*

*N'eo ket degemerus sal-vras Cynddylan fenz,
Goude d'he ferc'hen (bezañ marv)
O Ankou, perak e lezez ac'hanon ?*

*Tamm aez ebet e sal-vras Cynddylan fenz,
E nec'h ur garreg uhel,
Hep Aotrou, hep koskor, hep nerzh-kalon.*

*Teñval eo sal-vras Cynddylan fenz,
Hep tan, hep barzhonegoù,
Teuc'het eo ma divjod gant ma daeroù.*

Stafell Gynddylan ys tywyll heno
Heb dân, heb deulu.
Hidl fy neigr men yd gynnu.

Stafell Gynddylan a'm gwân i('w) gweled
Heb döed, heb dân.
Marw fy nglyw, byw my hunan.

Stafell Gynddylan ys peithawg heno
Gwedi cedwyr bodawg :
Elfan, Cynddylan, Caeawg.

Stafell Gynddylan ys oergrai heno
Gwedi'r parch a'm buai
Heb wŷr, heb wragedd a'i cadwai

Stafell Gynddylan ys araf heno
Gwedi colli ei hynaf
Y mawr drugerawg Dduw, pa wnaif ?

Stafell Gynddylan ys tywyll ei nen
Gwedi difa o Loegrwys
Gynddylan ac Elfan Powys.

Stafell Gynddylan ys tywyll heno
O blant Cyndrwynyn,
Cynon a Gwion a Gwyn.

Stafell Gynddylan a'm erwan bob awr
Gwedi mawr ymgyfrdan
A welais ar dy bentan.

*Teñval eo sal-vras Cynddylan fenez,
Hep tan, hep koskor,
Diverañ a ra ma daeroù e-lec'h m'emañ gourvezet.*

*Ur rann-galon eo evidon gwelet sal-vras Cynddylan,
Hep toenn, hep tan,
Marv eo ma Aotrou ha me a zo bev.*

*Drastet eo sal-vras Cynddylan fenez,
War-lerc'h ar vrezelourien gadarn,
Elfan, Cynddylan, Caeog.*

*Trist eo sal-vras Cynddylan fenez,
Goude an doujañs a oa din,
Hep ar baotred hag ar merc'hed a rae war he zro.*

*Trist eo sal-vras Cynddylan fenez,
Goude dezhi bezañ kollet he rener,
Doue trugarezus, petra a c'hellan ober ?*

*Teñval eo toenn sal-vras Cynddylan,
Goude da vrezelourien Vro-Saoz,
Bezañ distrujet Cynddylan hag Elfan Powys.*

*Teñval eo sal-vras Cynddylan fenez,
Rak bugale Cyndrwyn ;
Cynon, Gwion ha Gwyn.*

*Ur rann-galon eo evidon sal-vras Cynddylan, a-hed
an amzer,
Goude an divizoù meur
Am eus gwelet ez oaled.*

CANU LLYWARCH HEN - CANU HELEDD

ERYR ELI

Kembraeg kozh

Eryr Eli, ban y lef (heno)
Llwssei (ef) gwy(a)r llyn,
Creu callon Kyndylan Wynn.

*Y mae Eryr Eli yn uchel ei lef heno
Llyncasai ddiod o waed,
Gwaed calon Cynddylan wyn.*

Eryr Eli, gorelwi heno,
Y gwaet gwyr gwynn novi.
Ef y goet, trwm hoet y mi.

*Sgrechiai Eryr Eli heno
Ystaeniai yng ngwaed rhyfelwyr
Y mae ef yn y coed, mae hiraeth yn drum arnaf.*

Eryr Eli a glwyaf heno,
Creulyt yw, nys beidyaf.
Ef y goet, trwm hoet arnaf.

*Eryr Eli a glywaf heno
Y mae e'n waedlyd, ni heriaf ef,
Y mae ef yn y coed, mae hiraeth yn drum arnaf.*

Eryr Eli, gorthrymet heno
Diffrynt Meissir myget.
Dir Brochuael, hir rygodet.

*Eryr Eli mor druenus heno,
(Yw) dyffryn Meissir hardd,
Tir Brochfael, yn hir y gorthrymwyd ef.*

BARZHONEGOU LLYWARCH HEN - CANU HELEDD

ERER ELI

*Erer Eli, kreñv eo da griadenn fenez,
Banneoù gwad en deus bet lonket
Gwad kalon Cynddylan gwenn.*

*Youc'hal a ra Erer Eli fenez,
Saotret gant gwad ar vrezelourien.
Er gwez emañ, pounner eo an hiraezh a zo ennon.*

*Erer Eli a glevan fenez,
Gwadek eo, ne gredan ket tostaat dioutañ,
Er gwez emañ, pounner eo an hiraezh a zo ennon.*

*Erer Eli ken truezus eo fenez,
Traonienn gaer Meissir,
Douar Brochfael, pell ez eus bet a-raok dezhi
bezañ gwasket.*

Eryr Eli, echeidw myr,
Ny threid pyscawt yn ebyr.
Gelwit gwelit o waed gwyr.

*Eryr Eli sy'n gwarchod y moroedd
Nid ymwel a physcod yn yr aberoedd (y mae ef).
(Ond) geilw am wledd o waed rhyfelwyr.*

Eryr Eli, gorymda coet (heno),
Kyuore, kinyawa.
A'e llawch llwydit y draha.

*Eryr Eli, tramwya'r coed heno,
Hyd at lawnder y ciniawa
Y sawl a'i harwesu, y mae eu traha yn llwydo.*

*Erer Eli a evezh ar morioù,
Ned a ket da besketa ken en aberioù,
Azgoulenn a ra ur friko diwar gwad ar vrezel-
ourien.*


*Erer Eli a dremen er c'hoad fenez,
Koaniañ a ra betek e walc'h
An hini a flour anezhañ a zo trec'h e hardizh-
egezh.*

GWENDAL.TUDU KOUMANANT ECHU

PETRA C'HOARI GANT ANTON KADENN, ENKLASKER
PREVEZ ? UR C'HLENVED ISKIS A GRIGN ANEZHAN
ABAOE M'EO DEUT EN-DRO DEUS BRO-ALJERIA: AR
C'HOANT LAZHAN... FIZIET E VO UN ENKLASK
ENNAN GANT BRANDAN VEZEL, UN TAVARNOUR SOT.
PIV EO AR BAOTRED NENN, ROBI HA BOBI NENN?
EVIT PIV E LABOURONT ? PESEURT LIAMMOU A ZO
ETRE ANNA POURNA HAG AR GOMISEREZ MONA DO-
ZENN ? BEZ E VO KALZ TUD O VERVEL, ECHU DA
VAT GANTO O C'HOUMANANT WAR AN TAMM DOUAR-
MAN...

AL LANV

8, STRAED ENEZ-VAZ
AR BRADENN
29000 KEMPER



40 LUR E KOUST (+ 15 % mizoù)

